


AR BUGEL EMZIVAD

O. VOUELA

VAR BEZ E VAM.

GANT J. JENKINS.



AR BUGEL EMZIVAD, &c.

Ur mintinvez er goan pa oan o pourmen,
E cleviz gouelvan e bered ar villagen;
Lenv trist ur bugel, mesket a huanadou,
A save ac'hano eus a douez ar besiou.

Mond a riz er vered da gaout ar glac'harer
A gave d'in beza en preiz d'an disesper;
Eno. var ur bez fresg ur bugel a verziz
O vriata ar pri—pez arvest truezus!
Tostâd a riz ountan, leûn demeus a druez,
Evid e gonsoli en e dristidigez.
Neuse, en eur blega, e c'houléniz dezan;
Perag, va bugel kêz, oud aze o vouela?
Sec'h da zaelou druz, en em gonsol, va mignon,
Ha deus da holl c'hlac'har lavar d'in ar rezon.

Ar c'hêz paour a davaz pa glevaz va c'homsiou,
Mes ne baoueze da leuskel huanadou;
A-ben ur pennadic e sellou a savaz,
Ha gant ur vouez drist d'in-me e lavaraz:

Chetu bez va mam gêz!—ur vam deus ar guella,
Va mam vâd a garen dreist holl draou ar bed-ma,
Pehini am c'hare atao a greiz calon,
He mab unic e oan, objet he affection.
Va zad kêz a varvaz d'ar poent e oan ganet,
Ar pez a rentaz va mam trist ha goall-nec'het;
Rag goall-baour e oa, hag he holl gerent ive,
N'e doa d'e souten nemed he fisianç en Doue;
Mes dre labourat stard e veve ac'hanomp,
N'oa famil er vro-ma eurusoc'h egedomp:
Keit ha ma vevaz ne zioueren ket bara,
Pehini a zebren gand dour scler ar guella;
Ur boutou coad em boa, ha c'hoas ur gravaten,
Un tok colo braô, ha dillad caer ha kempen;

Er scol e oan caset, evel ma venne,
 Evid ma helljen un deiz gounid va bue':
 Va c'helen a rea mād e lezen an Aviel,
 O tiskeuz d'in scler hend ar vuez eternal.
 Chetu-hont an tyic e pini e choumemp,
 Er c'hornic deus ar c'hoad, el leac'h m'en em blijemp;
 Hol lochen a oa paour, mes dalc'het oa kempen,
 Ha caret e oamp gant hon holl amezeien;
 Pa'z ên deus ar guêr va mam oa nec'het,
 Ha gant joa, pa zistroen, e ven receyêt.
 Ma na vijen ket iac'h, n'eus fors pegen nebeut,
 Gant evez ar brasa e vijen-me soignet:
 Va mam oa bepred contant, joaus ha laouen,
 Dreist-holl pa vijen o c'hoari en e c'hichen.
 Mes, allas! pa vevemp evel-se en eurusded,
 Gant ur maleur diremed e oamp discaret;
 Va mam oa scoet gant ur c'hlenved ar c'hrisa
 Ha mervel a renkaz—n'oa evid resista?
 Na pez anken ha toc'hor! na pez poaniou!
 A souffraz hep croz dindan taoliou an ankou!
 Ar pez e nec'he en he amser diveza,
 Oa va lezel dilez var he lerc'h er bed-ma,
 Hep ur c'hâr d'am maga, na madou d'am sevel;
 Na pez stad drist, emezi, d'am paour kêz bugel!
 D'eur merer pinvidic a choume en kichen
 Ec'h adressaz neuse he diveza feden,—
 D'am c'hemeret, evel e vugel, d'am sevel,
 O prometti dezan e vijen-me fidel.
 Pa respountaz d'am mam e raje e voella,
 Gant cals a joa e trugarecâz anezan.

Un nebeut goude-se e c'houlénaz ac'hanoun,
 Ha gant beac'h e savaz he daouarn iên varnoun;
 Neuse, en eur vouela, e kimiadaz ouzin-me,
 Oc'h ober evidoun ur beden da Zoue;
 Va alia a reaz da ober va dever,
 Hag em bije da dad an den mād ar merer.
 Pa'z iz d'e c'haout goude, oc'h ober goulénou,
 Lavaret a read d'in penaos e oa marô!
 Un ear etranch e doa, he daou-lagad serret,
 Ne lavare ger d'in, evel pa vije cousget.

Goall-nec'het e oan, commanç a riz gouela,
 Hep gouzout c'hoas nemeur 'balamour da betra.
 Ur plac'h a reaz d'in mond ganti da bourmen,
 O prometti rei d'in leaz, crampoez ha souben.
 Pa zistroiz d'ar guêr va mam oa c'hoas cousget,
 Ne finve ket a-gren, holl e oa droug-livet;
 Hac e-leac'h an drous deus a glemou he anken,
 Ne gleven ket mui an izela criaden.
 En despit ma vouien va mam oa er guele
 Em boa poan a-veichou da gridi an dra-se.
 Deus ar chenchamant-se ne vouien ket ar rezon,
 Mes stâd drist va mam baour a ranne va c'halon.
 Dious an nos ar c'halvez en ty a antreaz,
 Ha tost d'ar guele ur c'houfr bras a lekeaz;
 Ur pok a roaz d'in, anes e oan spountet,
 Bag traou deus ar seurt-se biscoas n'em boe guelet.
 D'in e leverjont e voa poent mond d'ar guele,
 Mes e ty ar merer evid an nosvez-se.
 Kuitâd va mam gêz a rea cals a boan d'in-me,
 Hac o vouela e c'houléniz poka dezi;
 He bisach oa iên, sclasset oa he muzellou,
 Ne lavare ger d'in, serret oa he genou:
 Kuit e renkiz mond dindan holl bouez va glac'har,
 N'oa hini ker maleurus ha me var an douar.
 Beure mâd antronoz hep-dale e saviz,
 Kerkent gant va moereb d'ar guêr e tistroiz;
 Ha pa oemp erruet e-tal dor hol lochen,
 E cavchomp eno un toullad amezeien;
 Lança a riz en ty da gaout va mam adarre,
 Mes, allas! n'e c'haven en ty nag er guele.
 Pa c'halviz anezi, va c'halon glac'haret,
 Da vam, eme ur vreg, so ebars an archet;
 Marô eo, pautric kêz, caset vo d'ar vered,
 Arabed d'id gouela, bez brema consolet:
 Mes e-leac'h bihanât cresgi a rea va glac'har
 Pa dretent va mam en eur feçon ker barbar.
 P'erruaz ar beleg ar c'haôn a bartiaz,
 Ha me gant va moereb o vouela en heuliaz.
 O veza bet en ilis, ama e teujont,
 Ha va mam neuse en toull-ma a lekejont;

Renkout a riz mond kuit, beuzet holl en daelou,
Hag e dilezel e-touez ar re varô.

Neuse gant ar merer e oan-me kemeret,
Ha gantan abaoe oun bevet ha loget;
Mes trist oun bepred, hac alies e vouelan
P'en em gavan hep den nemedoun va-unan:
Va mam biken ne vo ganen ancounac'hêt,
Atao vo em c'halon ha presant d'am speret;
Doun meurbed em ene eo gravet he hanô,
He c'harantes, he furnez, he foan, he c'homsiou;
Ur vam dener e oa, leûn a vad-oberiou,
E c'haret a rin bepred beteg va marô.

Abaoe neuse ar bed ganen so chenchet,
N'oun ket e ty'r merer evel gueach-all tretet;
Ur paour emzivad oun, hep kerent na madou,
Mac'het gant ar c'hlac'har ha gant ar maleuriou.
Ha dre se ar c'holl deus va mam vâd ha tener
A gas he bugel paour d'ar c'hrisa disesper;
Hac em tristidigez e oan cazi souezet
Na zeue ur veach deus ar bez-ma d'am guelet.
Chetu perag, aotrou, oun deuet ama hirio,
Da vouela ha counta d'am mam va chagrinou.
Mes, allas! petra-benag m'em eus e galvet,
O counta va mizer gant ur vouez glac'haret,
Ne glev ket ac'hanoun, ne respount ken d'in-me,
Marô eo er bez-ma, ne ra mui va c'honsoli:
En santout a ran, dilezet oun er bed-ma,
Ha n'ouzon a betra e teuin da veza.

Petra a rin, aotrou? rag me zo maleurus,
Ha gallus eo d'in c'hoas dond da veza eurus?

Ar bugel a davaz, prosternet d'am daoulin,
Hag en eur skuila daelou e selle ouzin.
Neuse, gant carantes ha truez vras ountan,
En eur gomza goustad, e liviriz dezan:—

Bugel kêz emzivad! dîn a gompasion,
Da histor druezus e deus rannet va c'halon:
Ur c'holl bras e'ch eus bet, mes ne dâl ket glac'hari,
Guelloc'h eo dide cals clasg en em gonsoli.
Marô eo da dad, ha siouas! da vam ive,
Mes red eo en em blega da ursiou Doue,

Rag hen eo ar Mestr bras, hon Aotrou, hor C'hrouer ;
 Bezomp mud ta, adoromp-hen ;—chetu hon dever.
 Kement a ra zo mad, arabed e varna ;
 Meulomp e hanô sacr, ha stouomp dirazan.
 Da gerent, va bugel, o doa doujanç Doue,
 Beva a reent evid gloar e Vajeste ;
 Mes en env emaint brema, hep poan nac anken,
 Hac er vro-se a joa e choumint da viken :
 O c'horfou ive a savo deus an douar,
 E deiz ar varn vras, guisget gant luf ha gloar.
 Rag-se ta na vouel mui, mes kentoc'h bez joaus,
 Pa ema da gerent er bed all ken eurus.
 Mes te, paour emzivad, oud lezet er bed-ma,
 Ha gant poan ha gant glac'har oud mac'het dija ;
 Mes kemer courach, kezic, bez leûn a fisianç,
 Evidoud c'hoas me em eus cals a esperanç ;
 Rag dre e druez Doue en deus promoted
 Beza Tad ha Difenner d'an emzivaded.
 An dra-se a ziskeuz dija en da genver
 Dre gundu meuleudus an den mâd ar merer,
 Rag d'az mam e l'araz, pa oa tost da vervel,
 E savche ac'hanod evel e ouir vugel ;
 Hag abaoe an deiz-se n'en deus ket manket
 D'az kelen, d'az peva, evel ma eo dleet ;
 Holl a ra evidoud evel d'e vugale ;
 Kement-se holl a so dre brovidanç Doue.
 Meul bepred ta Doue, ha d'az mad-oberour
 Bez guir anaoudec, ha fidel en da labour :
 Heul lezen an Aviel, receo ar Salver,
 Hac e-kenver an holl gra bepred da zever ;
 Na lavar gaou biken, difenet eo laera,
 Ha mir da noaz nepred e netra da nessa ;
 Na zarempred james ar goall-gamaraded,
 Na tud a vrud fall, rag aoun e vez corrompet ;
 Darempred an dud fûr, hac heûl o exemplou,
 Ha gra a ouir galon peb seurt mad-oberiou ;
 Implich mâd da rezon, clasg an descadurez,
 Rên ur vuez gaer hervez lezen ar furnez ;
 Hep beza piz nepred, tach da veza prudent,
 Hac en da gondition bez joaus ha contant ;

E-kenver an holl dud bez modest ha poli,
 Hag ar muia dister dioall d'e offanci;
 Ma vezi noazet dre fautou da nessa,
 Na zalc'h ket droug pell, a galon pardon dezan;
 Atao bez charitabl, d'ar paour ro aluzen,
 Gra vâd d'an dud reuzeudic hervez da voyen;
 Rag pa ra da vad-oberour d'id an dra-se,
 Da zever ta eo ober kement all ive.

En ur gomz, va bugel, câr Doue dreist pep-tra,
 Eveldoud da-unan câr ive da nessa;
 Cred er Salver Jesus, câr-hen, meûl e hanô,
 Rent dezan an holl c'hloar, cân e veuleudiou.

Chetu hend admirabl ar boneur celestiel,
 Chetu hend an env hag ar joa eternal;
 O vâle ennan en em gavi un devez
 Kevret gant da gerent e-touez an aeles.

D'ar gomz-ma ar merer ganeomp en em gavaz,
 Ha goude va saludi, d'ar pauvr e lavaraz;
 "Deus d'ar guêr, va bugel kêz, na choum ket ama;"
 Ha dious-tu e savaz da vond kuit gantan:
 Mes gant un ear douç e teuaz d'am c'himiada,
 "Cals a vâd hoc'h eus great d'in, aotrou, emezan;
 "Jous oun brema, c'houi hoc'h eus va c'honsolet;
 "Ober a rin sûr kement hoc'h eus lavaret."

"Va bugel kêr," eme-me o poka dezan,
 "An dra-se em eus great gant ur joa ar vrasa;
 "Doue da vennigo, ra'z cargo a c'hraçou,
 "Epad ar vuez-ma ha goude ar marô."